


# Kousk, Breiz-Izel



*Andantino.*



An heol a zo ku - zet, se - tu e - chu an



de me glev ar c'hloc'h o tin - tal an A - ve



Kousk, kousk, Breiz - I - zel, bro dis - par se-



tu an noz o tont var an dou - ar. Kousk, Breiz - I - zel bro ker



mad, trouz ar mor braz a zav d'az lus - kel - lar

An heol a zo kuzet, setu echu an de,  
Me glev ar c'hloc'h o tintal an Ave;

w

## DISKAN

Kousk, kousk, Breiz-Izel, bro dispar,  
Setu an noz o tont var an douar,  
Kousk, Breiz-Izel, bro ker mad,  
Trouz ar mor bras a zav d'az luskellat.

C'houez vad an ed e bleun hag al lan alaouret  
War ar mêziou gant ar gliz noz a red.

Ar bastored a gân, o testum o loened;  
Gwerziou Breiz-Izel n'int ket c'hoaz kollet.

En traoniennou didrous, me glev kân an eastig;  
Telenner-noz, sonit flour ha dousik.

'Us da Vreiz o skedi, an nenv steredennet  
A lar 'z eus eun Doue ouz hor c'haret.

An neb a c'houez bemdez a c'hounid e repoz,  
D'an dud vad Doue en deus grêat an noz.

Arvor, ô douar sakr, a greiz kalon m'ho kar,  
Bro all ken kaer n'eus ket war an douar!

J. MARÉCHAL